

# KANTIK DA SANT MIKAEL

Patron Lesneven

## DISKAN

Risoluto

Kanomp oll d'hor Zant Patron, D'ann Aotrou sant Mi-  
kael, Enor, gloar a greiz kalon, Savomp hor mouez hu-  
el; Di-fennet n'euz, ar c'henta, Enn Env guiriou Dou-  
e, Ra zeui d'ho difen brema Var an douar i-ve.

## KOUPLAD

Guechall e bar ann En-vou P'e-do ann E-lez  
fall, Skuiz o ple-ga d'ann Aotrou, O klask se-vel ho  
zal; Mikael, enn ha-no Dou-e, Enn eur stourmat skri-  
jus Ho strink oll gant e gle - ze kreiz ann i-fern spontus.

## DISKAN

Kanomp oll d'hor Zant Patron,  
D'ann Aotrou Sant Mikael,  
Enor, gloar, a greiz kalon,  
Savomp hor mouez huel ;  
Difennet n'euz, ar c'henta,  
Enn Env guiriou Doue,  
Ra zeui d'ho difen brema  
Var an douar ive.

### I

Guechall e bar ann Envou  
P'edo ann Elez fall  
Skuiz o plega d'ann Aotrou,  
O klask sevel ho zal ;  
Mikael, en hano Doue,  
Enn eur stourmat skrijus  
Ho strink oll gant e gleze  
Kreiz ann Ifern spontus.

### II

Pa 'z eo savet ann Iliz  
'Vit sklerijenna 'r bed  
Peur-ober labour Jesus  
Ha rei deomp eurusted ;  
Kerkent Satan kounaret  
A ziroll a nevez  
'Vit miret ne vemp salvet  
Dre hent ar zantelez.

### III

Ann Iliz, hor mam zantel,  
A glask eun difennour ;  
Harpet var breac'h ann Arc'hel  
Eo trec'h d'ann enebour ;  
Ar Pap hag he vugale  
A lavar heb hean ;  
Piou zo ker braz ha Doue,  
Piou a zo par d'Ezhan ?

### IV

Hirio enn hor bro garet  
Ar stourmat a zo kriz,  
An dud fall d'euz diskleriet  
Ar vrezel d'ann Iliz ;  
Savet a eneb Doue  
Ho dorn a zo serret,  
Hag ene hor bugale  
Gantho a zo taget.

### V

Ar France so leun a fizianz  
E kreiz he ankeniou,  
Sellet ' ra gant esperanz  
Etrezeg ann Envou ;  
Sant Mikael, soudart Doue,  
Enn he zorn he vaniel,  
E ziredo adare.....  
Ar France n'hell ket mervel !

## VI

Ni, bugale Lesneven  
A gar hor Sant Patron,  
D'ezhan ar vella peden  
A zav euz hor c'halon.  
Goulennomp oll diganthan  
Difen hor feiz bepret,  
Rak dichaden eo Satan.....  
Ganthan veffemp kollet.

## VII

Selaouit hor pedennou  
Servicher braz Doue,  
Diouallit hor famillou,  
Ene hor bugale.  
Ha pa skoio ar maro  
Bezit enn hor c'hichen,  
Ha ni ganeoc'h a gano  
Gloar Doue da viken.

IMPRIMATUR :

*J. N. Le Gall*  
*R<sup>e</sup> du Folgoat*  
Quimper, 6 Septembre 1904.

J.-F. CORRIGOU, vic. gén.

